

KAN HA KAN ATAO...

KOUSK...

35

Andantino

An heol a zo Kuzet setu e-chu an de
Me glev ar c'hloc'h o tontal an A-ve :
Kouesk Kouesk Breiz Izel bro dispar, setu an noz o tont var
an dou-ar Kouesk Breiz Izel bro Ker mat Trouz
ar mor bras a zav d'az luskellat

Diskan

Kouesk, kouesk, Breiz-Izel, bro dispar.
Setu an noz o tont var an douar.
Kouesk, Breiz-Izel, bro ker mat,
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

- 2 C'houez vat an ed e bleun hag al lanh alaouret
War ar meziou gant ar gliz noz a red.
- 3 Ar bastored a gân, o testum o loened ;
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.
- 4 En traoniennou didrous, me glev kân an eostig ;
Telenner-nnoz, sonit flour ha dousik.
- 5 'Us da Vreiz o skedi, an nenv steredennet
A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret.
- 6 An neb a c'houez bemdez a c'hounid e repoz,
D'an dud vat Doue en deus great an noz.
- 7 Arvor, ô douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Bro-all ken kaer n'eus ket war an douar !

J. Maréchal.

HIRVOUDOU

allegretto.

Pe naoz oc'h c'houi ken kaer gwisket traon-
 -ien ha prat leun a vleuniou. Pe naoz e ka-nit
 la... lous-sed, tre ma maoun-me o skuilh d'elou.
 Ka-naouen-nou du-di-us va c'halon baour d'in
 a ran-no 'n eur gomz eus eun amzer eurus ha
 ne deuio bi-ken en-dro.

1

Penaos oc'h c'houi ker kaer gwisket,
 Traonienn ha prad leun a vleuniou,
 Penaos e kanit, laboused,
 'Tre m'e maoun-me o skuilh d'elou ?
 Ho kanaouennou dudius
 Va c'halon baour d'in a ranno,
 'N eur gomz eus eun amzer eurus
 Ha ne deuio biken en-dro !

2

Da c'houlou-deiz 'vel d'abardaez,
 Me garie mont war ribl ar ster,
 'N eur vouskana va c'harantez
 'Vel an eostig, an alc'houeder.
 Dindan ar gwez, laouen bepred,
 E kutuilhen bleuniou dispar ;
 Siouaz, setu me dilezet.
 Ha rannet holl gant ar c'hlac'har !